

# DA ZANT VODÉ

**Parouz Lomikel**

## I

Gand hon c'haëra kantiko  
 Kaned a greiz kalon  
 Enori ho relego  
 A fell d'imp zant Patron.

## DISKAN :

Zant Vodé, patron karet  
 Klêvet ouz pédenno  
 Ho pugalé daoulinet  
 Dirag ho rélégo.

## II

E kreiz nerz ho iaouankiz  
 C'houi gwitâz mam ha täd  
 'Vid digas da Drégéris  
 Tênzor ar c'hélo mad.

III

Gand hon zado c'heuz bévet

Héd meur a vlavézio

Liez ganthe c'heuz goëlet

Ha dousád ho foanio:

*Epad hir  
vlavézio*

*Meur demande  
le singulier*

IV

Pégen mad oa ho komzio !

Gant pébez karanté

A rôent ho c'halono

D'ec'h-hu mignon Doué

V

Pell'zo da c'hloar ann envô

Gand Doué oc'h galvet,

Hag évid ho mérito

En deuz ho kurunet,

VI

Chileoet ho pugalé

Hirié, hon Zad karét,

Ho c'halon, ho c'haranté

D'ec'h a vézo bépret.

VII

Zand évuruz, hon Patron,  
C'houi henchaz hon zado,  
Gred d'imp kaout nerz kalon  
Da c'honid ann eavo.

VIII

Goulennet bennoz Doué  
D'ann tado, d'ar mammo,  
Furnez vad d'ar vugalé  
'Vit kerzet 'n ho roudo.

IX

A bép drouk hon diwallet,  
Patron karantézuz,  
Tié, parko biniget  
Dré Vari ha Jézuz.

X

War ar gwagenno rénet  
Ha lestr, ha merdéad,  
Ha d'ar Porz ho digaset  
D'ar c'houlz, dinam dalc'h-mad.

XI

Ra vézo hon bugalé  
Bépret gwir gristenien,  
Neuzé 'vo mad ho bué  
Ha kaêr ho c'hurunen.

XII

Ha pa vimb ér baradoz,  
O zant Vodé karet  
Ni gâno d'ec'h mil bennoz  
Hag ho karo bépret.

Brioci, die 30 augusti 1897.

Imprimatur,

CHATTON, can., vic. gen. lecteur à



*Composé en dialecte  
de H<sup>te</sup> Cornouaille  
par M<sup>r</sup> Le Riquier  
alors vic. à Bourbriac  
aujourd'hui (1920)  
Kyril-Moelou  
(Mis en dialecte de  
Briquier par X..)*